

SESSION 2016

**CONCOURS EXTERNE / SECOND CONCOURS INTERNE
DE RECRUTEMENT DE PROFESSEURS DES ÉCOLES
SPÉCIAL LANGUES RÉGIONALES**

BRETON

ÉPREUVE ÉCRITE D'ADMISSIBILITÉ

L'usage de tout ouvrage de référence, de tout dictionnaire et de tout matériel électronique est rigoureusement interdit.

Durée de l'épreuve : 3 heures

Coefficient : 2

Ar vuhez nevez e Pariz

Sioul ha brav e vevas Tad-Kozh hag e verc'h Frañsoaz e-pad daou vloaz. Pa oa aet da heul he fried 'oa deut ar verc'h all en he flas, met d'he heul 'oa daou vugel yaouank, paotr ha plac'h. Natur eo d'un tad-kozh karout e vugale-vihan met sioulañs an ti a oa aet da get, hogen an dud kozh a gar ar sioulañs.

5 Diouzh he zu, Mamm, du-hont er gêr vras, a oa kemmet-tre he buhez. Tiez e-lec'h parkoù, galleg e plas brezhoneg, tud dizanavez e-lec'h parrouzianed anavezet holl ganti. Hec'h-unan en he lojamant pa veze va zad da heul an tren war zu ar C'hreisteiz, ha ma veze peder nozvezh e roud.

10 Prim avat e oa kavet roud outi, ur Vretonnez gant he c'hoef oc'h ober hec'h ampledou a vez merzet e-touez an dud all, ha klasket kaoz outi. Koef Treger 'oa ket da faziañ! Bro-Dreger a zo bras-divent ha n'eo ket Tregeriz 'vanke e Pariz. Pa'n em gaver etre kenvroiz en harlu 'n em santer raktal kar pe bar hag e vez tennet kaoz diwar meur a genvroad en e gartier : he breur-kaer, pried Teofil, he breudeur-kaer, tri breur va zad en-dro da Bariz. Mamm ne oa ket kollet naet, ha galleg mat a oueze, daoust ma ne oa ket bet stank ganti an darempredoù er yezh-se abaoe ma oa deut er-maez ar skol.

15 Va zad ivez 'oa barrek war ar galleg, ne oa ket chomet pell er skol koulskoude. Da zek vloaz 'oa lakaet dezhañ ar vourell en e gerc'henn. Bet e oa dija end-eeun o klask e « santifikad » da dek vloaz. « Priz ar C'hanton » a veze graet eus an arnodenn-se.

20 Pevar baotrig 'oa aet er bloaz-se gant an aotrou Rault da Blouared da glask « Priz ar C'hanton », an aotrou Rault 'oa eus Breizh-Uhel, ha ne ouie ket a vrezhoneg. Dimezet 'oa da Varjob Roparzh eus Tonkedeg. Homañ ne ouie nag A na B, na ger galleg ebet!!! Fentus e oa se. Diouzh ar beure oa d'ober en em gavout er bourk e ti ar skolaer. Abred, rak ur c'hwistad hent a oa d'ober da vont betek Plouared. Marjob bepred, 'oa prest ar c'hafe ganti hag a lâre d'ar baotred vihan :

25 « Debret bara, bugale ma rampo an avel diwarnoc'h!!! ha skoit pezhioù galleg gant an aotrounez-se bremazon! »

Runambêr 'zo ur c'hardlev bihan diouzh ar bourk war roud Plouared. Setu a-benn ma oa ar vandenn o tremen dre Runambêr e oa stag ar charabañ gant Charlez Dualenn da gas anezhe betek bourk Plouared. Met ne oa ket chomet eno da c'henaouegiñ gant e gazeg da c'hortoz an arnodenn d'echuiñ :

30 « Da zont d'ar gêr, » emezañ, « ho po an holl amzer. Amañ oa ret arruout a-benn an eur ha berr ho kalon c'hoazh un tammig. Chañs vat deoc'h! Ken emberr ha bet gant ho jeul! »

Ma, rasket 'oant o-fevar, ha trist o genoù o foetañ hent an distro. Ar skolaer 'oa chomet da roulañ gant skolaerien all, ha deut d'ar gêr dre an tren goude betek Kerofern.

35 Va zad-kozh, Charlez, a oa ur paotr reut, n'ouzon ket kaer petore degemer 'oa graet d'am zad o tistreiñ gant e gofad-yod.

40 Komzet e oa bet eus kas anezhañ da Lannuon er bloaz war-lerc'h. Met pa glevas an aotrou-perc'henn Runambêr ar gaoz, e oa deut da lavarout da'm zad-kozh : « Petra 'glevan, Charlez? Emaoc'h e-sell da gas ho mab d'ar golaj? Propoc'h eo deoc'h derc'hel ar c'hañfard-se er gêr da labourat, sur. »

An aotrounez a veze ret o selaou, ha ne blije ket dezhe gwelout bugale o mererien o kaout kement a zeskamant evel o re.

45 Chomet e oa er gêr eta hep santifikad ebet. Met ne gollas ket kalon. Diwezhatoc'h, pa oa deut un eil skolaer er barrez, e oa kroget d'ober « skol-noz » ha va zad, tost evel ma oa d'ar bourk, en devoa darempredet aketus ar skol-noz e-pad daou pe dri goañv ha tapet memes tra un tammig deskamant prop evit ur peizant.

E Tonkedeg ne veze ket digarez da gomz galleg a-stroñs, met erru e Pariz pe e lec'h all e kavent gratis bout gouest da'n em zibab gras d'o zammig galleg.

I- Goulennoù : respontit d'ar goulennoù gant frazennoù.

- 1- a) Eus peseurt korn-bro eus Breizh zo kaoz amañ ? Kemerit harp war an destenn evit arguzenniñ.
b) Roit skouerioù eus liv ar yezh implijet er c'horn-bro-se (tennet eus an destenn). 2 boent
- 2- Displegit petra oa cheñchet e buhez « Tad-kozh ». 1,5 poent
- 3- Da belec'h oa aet Frañsoaz da chom ha perak, d'ho soñj ? 1,5 poent
- 4- Daoust hag eñ e oa kollet Frañsoaz er gêr vras ? Displegit. 2 boent
- 5- Daoust hag eñ e c'helle kement bugel a oa tremen ar santifikad ? Displegit. 2,5 boent
- 6- Peseurt levezon o devoa an aotrounez war o mererien, hervez an destenn ? 2,5 boent
- 7- Estreget da Bariz, da belec'h oa divroet Bretoned en XX^{vet} kantved ? 1 poent
- 8- Peseurt sell o doa tud Pariz war ar Vretoned ? Roit ur skouer. 2 boent

II- Troidigezh

Troit e gallek adalek al linenn 9 « Prim avat ... » betek al linenn 18 « an arnodenn-se ». 5 poent